

## DIAOUL AR VRETONEC

107

N'euz ket pell, Satan, war he benn  
Eur c'helc'h ru-tan da gurunen,  
Eur forc'h daou-vizeg da walenn,  
D'ann diaoulo gomze evel-hen :  
— « C'houi holl 'zo bet gan-in kaset  
Da labourat dre greiz ar bed ;  
Tostaet aman ma klevin  
Ha labour mad 'c'h euz aozet d'in.  
Diaoul an Normandi, lavaret  
Ped ine hoc'h euz goneet ? »

\*\*\*  
— « Ma mestr, pe e c'hourc'hemennet,  
Ar wirione d'hec'h 'zo dleet :  
Poan ha poan braz a zo breman  
O kaout ineo da bakan ;  
Mar na vefe al laeronsi,  
Holl, 'vit laret, ec'h int disi ;  
Ho zroio-pleg hag ho gevier  
Na dalveont ken eun diner ;  
Bec'h 'm euz o chach hinienn  
Dre ar vewenti 'n em laso ! »

\*\*\*  
— « Ha c'houi, diaoul ar Gasconed,  
Tostaet aman ha komzet. »  
— « Braouik-brav 'ia ann treo gan-in,  
Mes gand pebez poan hag ijin !!!  
Gwech-all 'met kemer hanoio,  
Kammed goullo ma rouedo !  
'Vel-se, siouaz ! na man ken kont :  
Re a zour 'n ho gwin a lekont !  
Mar dle kement-se pad ato,  
'Vo red d'in kuitaat ar vro. »

\*\*\*  
— « Ha te, diaoul ar c'herio braz,  
Penaoz 'c'h euz groet, pe well pe waz ? »  
— « Gwasoc'h 'vit gwell, hen ansav 'ran,  
N'a ken peb tra 'vel ma karan ;  
Ankoeet gant tud ar c'herio  
Ann drouk-pedenn, ar mallozio ;  
Ann ebato a dalc'h a-vad  
Da daoni an dud a-vagad ;  
Mes d'ar zul evel d'ar gouelio,  
E ve leun-tenn ann ilizo,  
Ha kement-man eo, Satan,  
'Ra d'in kounnari ar muian. »

\*\*\*  
— « Ha te, diaoul ar Vretoned,  
Ha kutuill c'houek ec'h euz-te groet ? »  
— « Mestr-gwif, hen ansav a dlean,  
Kutuill gwall-dreud ; mes 'heb ehan,  
'Labour 'vid-omp an hostijen :  
Derc'hel hepken ar wenojen !!!  
Eur breton diwar dour n'eo ket  
Eun den da bakan ken ezet ;  
Mes, pe 'neuz evet gwin-ardant,  
N'euz, neb-lec'h, den o komz ken koant :  
Neuze e had ar mallozio  
Evel ann ed enn he barko !  
Ha tridal gant joa a rafec'h  
He leou-douet mar klefec'h ;  
A-hend-all na chelaouont ken  
Pez lavar d'he ho beleien.  
Mar pad ze eun neubeud blaio,  
'Teufont aman dre vandenno ;  
Zellet ma roll hag e welfet  
'Meuz ma lod mad a zud daonet !! »